

# DIELLOÙ



Al Liamm Tir na n-og niverenn 47 miz Du- Kerzu 1954 (pajenn 92)

Ur gelaouenn nevez moulet gant Al Liamm

Abaoe un nebeut mizioù e oamp krog da brientiñ ar gelaouenn-se. Deut eo er-maez. Anvet eo bet « Ar Vro » ha graet eo dreist-holl evit ar re n'int ket evit lenn Al Liamm. Setu perak ez eo skrivet en ur brezhoneg aes. Graet eo ivez evit brudañ Al Liamm e-touez an dud ha lakaat an holl da anvezout al levrioù a embannomp hag al labour pouezus a reomp evit ar yezh a vez tavet warnañ gant ar c'helaouennoù » breizhek ». Holl, lennit, koumanantit ha brudit « Ar Vro » Diskouezit anezhi d'ar re a gav Al Liamm re ziaes da lenn. Koumanant : an 12 niverenn 500 lur war baper mat, ha 300 lur war baper boutin. Dll St Gal de Pons, rue des Salles, Guingamp.

*Embannet e voe ar gelaouenn etre 1954 ha 1974*

